

## Rond bigouden – Touri Toura

- 1 - Deuit ganin-me plac'hig yaouank, deuit ganin d'am batiment  
Ha me ziskoueno deoc'h ma c'hambroù, touri, toura, toura la digreda  
Ha me ziskoueno deoc'h ma c'hambroù, 'r c'haerañ zo er batiment
- 2 - O salokras kapiten, d'ho patiment na yin ket  
Kar ma zad ma mamm zo er gêr, touri....  
Kar ma zad ma mamm zo er gêr o ma c'hortoz da goaniañ
- 3 - O salokras plac'h taouank, dig ho tad ho mamm 'm eus goulenna  
Da zont ganin d'am batiment, touri...  
Da zont ganin da goaniañ
- 4 - Pa voe koeniet an dud-se ha servijet ar c'hafe  
Neuze ar plac'hig yaouank, touri...  
Neuze ar plac'hig yaouank a gomañs d'en em chalañ
- 5 - O salokras plac'h yaouank, te ne n'em chalez ket  
Kar e-barzh me batiment, touri...  
Kar e-barzh me batiment, te na 'to droug ebet
- 6 - O salokras kapiten, taolit ho pag en dour  
Ha ma yafec'h da ma c'has me, touri...  
Ha ma yafec'h da ma c'has me betek palez tal ar mor
- 7 - O salokras plac'h yaouank re ziwet 'peus goulennet  
Tri-ugent ha tri-ugent, touri...  
Tri ugent ha tri-ugent zo barzh rivier an Naoned
- 8 - O salokras kapiten, roit din da gontell al lañs  
Da droc'hiñ ma rubannoù, touri...  
Da droc'hiñ ma rubannoù peogwir int skoulmet
- 9 - O salokras plac'h yaouank, ma c'hontell ha lañs 'po ket  
Dalc'hit ma hini argant, touri...  
Dalc'hit ma hini argant, honnezh ne laran ket
- 10- Ar gontell argant dezhi ha goude dezhi pa voe groet  
Ba e-kreiz poull he c'halon, touri...  
Ba e-kreiz poull he c'halon he doa he flantet
- 11- Me mije bet an tamm amzer, 'r bannig liv, un tamm paper  
Me mije skrivet ur lizher, touri...  
Me mije skrivet ur lizher da he mamm ha da he zad
- 12- Me mije skrivet ur lizher da he mamm ha da he zad  
Ha hini a nije lennet, touri...  
Ha hini a nije lennet a nize bet kalonad
- 13 - An dra-man a zo c'hoarvezet gant ar brinsez an amour  
Ha bremañ neus mui a goñje, touri...  
Ha bremañ neus mui a goñje da gas merc'hed war ar mor